

Merc'hed yaouank Boulvriag

Mod.^{to}

Me zo ne vez bet n'eun eu red e barz par-rosz
Boul-vri-ag Ere me net am-eus daou de-vez
ha bet di-ge-me ret mad. Ka vet am-eus
berr an am-zer gant tud yaouank ar vro z'e
Bir vi ken n'o an-hoa in-ken e tre ma vin
em bu-ez

Me o salud Boulvriagis deut ec'hon c'hoaz d'o klovek
Abou'e m'ion arru en o touez e weru ma spered.

Ta welan ar vourvriagez ken korfed haer ha ken koant
Barz en Boulvriag e man zur fleuren ar merc'hed yaouank

Klovek am eus pell zo amzer komz dezuz merc'hed Boulvriag

Tenoz e oant interestet ha stummet da labourat
Gredan ket e zo ewelte en tre Gouened ha Gwengamp.

Barz en Boulvriag e man zur fleuren ar merc'hed yaouank

4^e C.
Bet ee'hon en zant Adrien Gouisteruz ha pont-Meloe
Kaer am eus galoupad er vro ne gavan ket evelte
Ken jarauz ez int deuz an holl disket braz ha zavet mat
Ne gavan ket da blijout din evel merc'hed Boulvriag

5^e C.
Goude ee'hon bet e Kerrien e Magor hag e zenven
Ouet dar ger dre blijidi eur quer a valeaden
Kaer am eus bale dre ar vro ha furchal en tier mat
Ne gavan ket da blijout din evel merc'hed Boulvriag

6^e C.
Breman me a iey aliez da vourvriag da vale
Barz ar vro ze me a zo zur da gavour danve grage
Ma c'halfen gallout dimezi deur vourvriagez yaouank
Neuzi vent an everussan demouz an departamant

7^e C.
Bet ee'hon e Boulvaskelen e ker barz e prat-an-Ilay
Dre holl lec'h am eus tremenet on bed gouezet gante
C'i'hanné on bed retornet da vilin ar hoaz on eat
Kenon oa eur vleuen yaouank Mez hirie e dimezet

8^e C.
Otro zan Briak biniget patron euz ar barroz man
Skuliet o holl madelezoù war kement a zo aman
Evit ar priego yaouank e zo dimezet hirie
Goulennet vite grasou kaer digant on otro Doue

9^e C.
Marteze ar merc'hed yaouank deuz ar parrozo war dro
Le c'hafé donet da facha dimeuz ma gourc'héméno
Koulboudé e lavaran c'hoaz ha pa vent blamet mil gwech
Da vere'hed yaouang Boulvriag bepred a roin ma mouez

10^e C.
An hiri deuz great ar son ma e zo eur c'hoaz den yaouank
Hag e zo arru piell amzer aboue man en Ker Gwengamp
Hag a deu c'hoaz da laret d'ac'h arok donet d'o kuitat
Na n'ankrao ket birviken merc'hed yaouang Boulvriag
Léinad